

NOZVEZH AR CDI, SPONTUS !!!,

Ambre, Ifig (5^{et}) ha Maiwenn (3^{de})

Ifig hag Ambre, daou skolajiad an hentenn divyezhek (5^{vet} klas), o doa degemeret skolajidi ar 6^{vet} klas d'ar Meurzh 21 a viz Even da 9 eur noz. Dont d'ar skolaj d'an noz, perak 'ta ?

E sal ar gouelioù o doa displeget piv eo an Ankou. Goude e oa bet graet daou strollad, unan vont da bourmen, unan all o vont d'ar CDI da dresañ an Ankou ha da debriñ krampouezh.

Dizoloet e oa bet lec'hioù kuzh ar skolaj, an Ankou e foñs an trepas o lemmel e falc'h, privezioù kozh gant ur c'horf eskern ha trouzioù spontus an noz...

En ur pezh kuzh e oa an itron Morasse o klask un dram evit lazhañ an Ankou, ha se abaoe 1953...

Pierre, eus an trede klas (hentenn divyezhek), a oa o seniñ gant ur gitar tredan, trouzioù aonius. Marie-Pierre he doa huchet e brezhoneg war an itron Morasse rak lous e oa an traoù abalamour dezhi!

War-lerc'h bezañ tremenet dre drepassoù dianv all e oa arru ar strollad en ur solier teñval e-lec'h ma oa Victor (3^{de} klas) ha Serj ar C'honter o c'hortoz. Kontet en doa un istor tennet eus « Mojennoù ar marv » gant sinadoù pe seblantoù...



E fin ar bourmenadenn e oa distroet an holl d'ar CDI e-lec'h ma chome krampouezh ! Selaouet e oa bet Maiwenn (3^{de} klas bzg) o seniñ gant he fleüt a-dreuz ha dañset e oa bet ur gavotenn a-drugarez da Victor hag e akordeoñs. Ur gontadenn all gant an Ao. Le Mallefan hag e oa arru 11eur, poent mont da gousket.... ha d'ober gwallhunvreoù ?

